

Rouedad ar Stalioù Kan / Réseau des Ateliers de Chant
Ragtres "KANT A GAN!!!" / Projet "CENT CHANTENT!!!"

Nevez Amzer Kastell 'Ne 2017 / Printemps de Châteauneuf 2017

Gwiliou ar Bleiz

E miz genver hanter ar miz
Pa teu ar reo da chas ar glizh

Maduron maduri teñ ya yañ yi maduron du ri yeñ yañ yi

Neuze vez gwel' Gwiliou ar bleiz
O tond er-maezh deuz e lojeiz

Neuze vez gwell' tond war ar prad
Hag hennezh a rankontr ur marc'h mat

"- Petra rit aze eta loen kaezh?
Mes c'hwi a loj an noz er-maezh?

- Me a zo marc'h d'ur miliner
A vez bemdez dre-gêr dre-gêr

Ba'm zroadig dreñv me meus ur gor
A vez pep mare o tigor

- Me zo medesin ha doktor
A oar al louzoù deuz ar gor

Savit ho troad eta loen kaezh
'Vit ma wellan pelec'h mañ ho plezh"

Ar marc'h a sklapas un taol ruz
A lañsas Gwiliou ken e ruilh

"- O dav eo dit be' luch pe dall
'Vit ober di-me kemend-all

- O me ne non na dall na luch
Mes c'hwi eo Gwiliou hag a furch!"